

KIS-449 – A-zivout Termenadurezh

(Olier AR MOGN, Kenurzhier *Servijoù ar Brezhoneg* da holl izili *Termbret* – 19 01 94)

[Arroudoù eus ur c'helc'hlizher embannet gant *Servijoù ar Brezhoneg*, rann eus *Skol Uhel ar Vro*, Roazhon]

[...] War dachenn an dermenadurezh he deus Bro-Gebek tapet ul lañs a zo anavezet er bed a-bezh. Pa oa bet savet *TermCat* e Katalonia hag *Uzei* en Euskadi e oant bet skozellet kalz gant Kebekiz. Da skouer e oa deuet e-maez e 1990 doare katalanek an dornlevr *Méthodologie de la recherche terminologique*, un dornlevr bet savet e Bro-Gebek. [...]

Unan eus labourioù kentañ *Termbret* a vo sevel un hentenn dermenadurezh vrezhonek. Tu a vo d'en em harpañ war labourioù a bep seurt. Tu a vefe, da skouer, da dreiñ ha da azasaat dornlevr Bro-Gebek evel m'eo bet graet pevar bloaz 'zo e Katalonia. [...]

(GE da OAM – 12 02 94)

Mat eo reiñ en doare-se un alberz eus an hentennoù heuliet er yezhoù all da sevel an termenoù kalvezel. Dav eo savlec'hiañ fraezh ar gudenn koulskoude.

An dermenadurezh a denn da wiskad gorre al lavar : ma ne vije nemet ar gwiskad-se oc'h ober al lavar e vije kenkoulz freuzañ an holl yezhoù nemet unan — pezh a denn da c'hoarvezout hiziv, e daou zoare da nebeutañ : a) e domanioù evel ar Jedoniezh, ar Fizik, ar Gimiezh ma vez al lavar diazez e stumm delunioù anyezhel ; b) en darn vrasañ eus an diskiblezhioù kalvezel ha gouiziel ma vez ar saozneg o tistroadañ ar yezhoù all. Ar re a venn kaout un dermenadurezh en o yezh a denn o abegoù, n'eo ket eus an dermenadurezh he-unan, met eus bezañs gwiskadoù all al lavar. Ar stadadenn-mañ a ro dimp an dro da zivrazañ savlec'h dibarek al labour brezhonek.

Un dra eo labourat war an dermenadurezh e saozneg pe e galleg, eleze e yezhoù diorreet kevredigezhioù diorreet : bev emañ er yezhoù-se holl wiskadoù al lavar adalek ar gorre betek an don ; pa lavarer “an don” ne reer ket anv hepken eus un donder kefredel pe gantaezel, met eus un donder all, amzerel, un donder istor, an hini a ro d'ar yezh he unded ha dreist-holl he unelezh (ar gantreizh mar be da liested ar yezhoù). E par an dermenadurezh ez eo diflach dre bennaenn pep keal e forzh pe yezh ma ve dec'heriet — domani an denotañ hag an unergeñveriñ eo, unvent ar gevadegelezh. Er gwiskadoù donoc'h e vez ar fiñv o ren, berv ar c'hennotañ o tiskogellañ an denotadurioù, an ergeñveriñ o teurel broñs dizehan bep ma sav ar sabr eus donder istor ar yezh o reiñ d'ar speredoù ar vent treadegel na ve ket hepti a spered den. Eno e c'haller a dra sur treiñ ar bommoù lavar eus ur yezh d'unan all, antroadus e chom avat an andonioù ma strinkont, an unvezioù dibar-se, kevrinus, ez eo pep yezher deuet unan gant e yezh, aet e gorf da gorf istorek ar yezh. Da vezañ fraeshoc'h e kemerin ur skouer.

Ar Gl. *conception* el lavar gorre a zec'her ur c'heal plat eus ar Stlenneg, douget a-du-rall gant ar Sz. *design* ; er gwiskadoù don e tregern gant ar ger gallek istor a-bezh ar preder betek en e wrizioù yezhel ha dezevel latin ha hellazek azbevaet ha bepred strujus evit ar prederour kempred — endra sav e donder ar Sz. *design* ur birvilh ken nevezus a gennotadurioù prederel hag arzel. Seurt digorded barr a bromesaoù ne oufe dinodiñ e-maez ar puñs treadegel unel ez eo pep hini eus an div yezh. Boas eur da reiñ an Al. *Begriff* da gevatal d'ar Gl. *concept*, ha bennozh da gevataladurioù a seurt-se e vez frouezhusaus an eil evit egile preder alaman ha preder gall ; koulskoude ne oufe *Begriff* ha *concept* kaout andon o frouezhusted piaouel e-maez korfoù istorel ketep ar yezherezh alaman hag ar yezherezh gall.

Un dra all eo labourat war an dermenadurezh e brezhoneg, eleze en ur yezh hep kevredigezh, hep perzhiadur e keflusk an istor abaoe kantvedoù. Penaos gweañ ur gwiskad gorre pa ra diouer ar gwiskadoù don ? Ar glaoustre vrezhon eo bet stagañ ganti o tiorren ar yezh ha, dre ar yezhañ, astenn un dreadegelezh o sankañ diouzh un tu e donder istor an denelezh, o tispakañ diouzh an tu all e rezh lec'hioù krouiñ. Dodad kreiz *Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh* eo. Kentel Roparz HEMON a c'haller krennañ evel henn : “Brezhonegit ha grit a garit.” Diwar he lusk ez eus bet diwanet strolloù bihan brezhonek a zo o ster bezañ lec'hioù krouiñ ha lec'hioù krouiñ n'eo ket evito hepken (kluboù ne vent ken neuze), n'eo ket “evit Breizh” (pezh a ve proviñsegezh hep mui), hogen o vukañ da holl gevredigoù ar bed. Gant gerioù all, an amkan merket gant Roparz HEMON eo ober eus parlant ul lec'h lavar un amzer. E-keñver an amkan-se emañ da savlec'hiañ al labour war an dermenadurezh : evel diorreadur gwiskad gorre brezhonek hon amzer ; merzhomp evelkent ez eo an dermenadurezh un emell eilrenk,

o talvout hepken evel astenn da ziorreadur ar gwiskadoù don ; frouezhus hep mar degas ar brezhoneg keñver-ha-keñver gant ar yezhoù all, pennañ andon ar frouezhusted zo avat en istoregezh amparet gant al lec'hioù krouiñ brezhonek kempred.

Anat eo hiziv c'hwitadenn an esae renet agentaou d'ober ur brezhoneg dre veuziñ ar parlantoù lec'hel dindan lanv an amprestoù etrevroadel. Arabat e ve bremañ kouezhañ en ur marmouzerezh all a ve sonnañ ur yezh war ziorren e-barzh rouedad hentennoù plaket diwar ar yezhoù diorreet.